

IMBOURCH



un hent
a garran

Eil bloavezh

pe a zigoran




31 Genver 1971

kelaouenn

bolitikel

niv. 13



IMBOURC'H, K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 13

31 Genver 1971

T A O L E N N

Kefridi ha tonkad "SKOL AN EMSAV".....p.3

Ar pennadoù embannet gant izili EMSAV AR BOBL VREZHON ebarzh
Imbourc'h ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur. K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon.
Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver. Priz an niverenn :
2,00 lur. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da : EMSAV AR BOBL
VREZHON (IMBOURC'H), 30 leurgêr al Lisoù, Roazhon.

LE BUREAU DE LA CONFÉDÉRATION GÉNÉRAL

1921

KEMENNADEN

Kounañ a reomp d'ar goumananterion e krog
ar c'houmanant e miz Genver ha pediñ a reomp
anezho da gas o c'houmanant e-kerzh an tri
miz da zont. Ar re n'emaint ket e soñj ad-
koumanantiñ a zo pedet da gas endro an niverenn-
mañ. Kement-se a skañvaio labour ar mererezh.

Ar goumanant a reomp d'ar goumananterion e krog
ar c'houmanant e miz Genver ha pediñ a reomp

Ar goumanant a reomp d'ar goumananterion e krog
ar c'houmanant e miz Genver ha pediñ a reomp
anezho da gas o c'houmanant e-kerzh an tri
miz da zont. Ar re n'emaint ket e soñj ad-
koumanantiñ a zo pedet da gas endro an niverenn-
mañ. Kement-se a skañvaio labour ar mererezh.

Ar goumanant a reomp d'ar goumananterion e krog
ar c'houmanant e miz Genver ha pediñ a reomp

KEFRIDI HA TONKAD

"SKOL AN EMSAV"

An displegadenn-mañ diwar-benn dazont SKOL AN EMSAV a zo un arnod da savlec'hiañ an aozadur-mañ e framm ar stourm broadel he deus Breizh da ren er bloavezhioù seikont a zo o tigari . Ne c'houlenn tamm ebet raktresañ en un doare resis al labour a vezo sevenet e gwirionez hogen hepken teurel un tamm sklerijenn war an diabell-weled a zispak dirak an aozadur ma fell dezhañ kreskiñ da vat, c'hoari ur roll a-bouez en Emsav ha tec'hout diouzh an droukverzh en deus sammet aozadurioù all a seurt gantañ bet savet un un tremened tost war ziazezoù goullo.

=====

Mennet eo an dezrevelladenn-mañ da ginnig un dankaniezh diwar-benn kefridi ha tonkad SKOL AN EMSAV war verr hag hir dermen, ac'hann da zibenn ar c'hantved.

RAKLAVAR

Emañ hor pobl, goude bezañ kollet hec'h emskiant vroadel, war var da goll bremañ diwezhañ aspadenn hec'h hêrezh vroadel, elese, he yezh vroadel, ar brezhoneg. Dija ez anzaver e-touez an difennourion hengounel anezhi, a oa bet techet betek henn koulskoude da welout an traoù war o zu mat, n'eus ken nemet 500.00 bennak a dud oc'h implijout anezhi bemdez. Ha, moarvat, na vefe graet un enklask sirius e vefe merzet ivez, siwazh, ez eo an darn-vuiañ eus ar yezherion-se tud war an oad ha n'o deus ket kemeret poan da leskiñ ar brezhoneg a gomzont o unan d'o bugale.

Diwar an emgav-se emañ ar yezh vroadel eta war var da steuziañ a-grenn a-benn ur remziad pe zaou. Da lavarout eo, ma ne ziwaller ket, ez eo tonket da Vreizh mont da get a-grenn e deroù an trede milved.

I

PETRA EO AN EMSAV ?

Evit parrat ouzh an dañjer marvus-se ez eo bet savet an Emsav e deroù ar c'hantved-mañ. Bez ez eo an Emsav eta an danvez broad vrezhon nevez adkavet ganti ster hec'h istor hag adpiauget ganti he c'hevala istorek ha pergen he yezh, gouest dre se da aozañ ur gevredigezh hag ur stad vroadel nevez a grouo ur sevenadur broadel nevez el ledenez-mañ.

PETRA EO "SKOL AN EMSAV" ?

SKOL AN EMSAV a zo ar benveg kelenn dañzeet gant an EMSAV evit daskoriñ da bobl Vreizh elfennoù pouezusañ he c'hevala istorek, he yezh, da gentañ, war un dro gant anaoudegezh he lennegezh hag hec'h istor, hag aotren dezhi en diwezh ren ur vuhez kevredigezhel e brezhoneg.(1)

Displeget e vo pelloc'h, da heul burutelladur embregadenn ar skolioù brezhonek rannvroel ha ledemsavel ster hag amplegoù resis kefridi SKOL AN EMSAV.

Klask a raimp diouzhtu avat termeniñ amkanioù SKOL AN EMSAV er bloavezhioù da zont ha displegañ hec'h urzhiadur a hiziv.

An amkan kentañ a zo stagañ ouzh pep trev nevez savet gant an Emsav ur skol he devo da gefridi bastañ da ezhommoù

(1) Kounañ a reomp ez eo bet diazezet S.A.E. e dibenn miz Eost 1969.

kelennerezhel an drevidi. Meur a rumm avat a c'hell mont d'ober ar skol-se : ur rumm elfennel a zo en e garg deskiñ ar yezh d'ar c'hallegerion unyezh ; ur rumm klokaat evit deskiñ komz ha skrivañ ar yezh ; erfin, un trede rumm a zo gouestlet da studi al lennegezh hag an istor broadel ; an tri rumm-se a vez heuliet diouzh reol e-pad tri bloavezh a gempleg kentañ derez SKOL AN EMSAV (1).

Ar rummoù-mañ a c'hell aes bezañ aozet e par an trevioù, war ar maez, er bourc'hioù pe er c'hêrioù bihan. Er c'hendrevioù - o c'hoarvezout eta eus trevioù ur gêr etre pe vras a-walc'h - e vezo aozet rummoù all o klotañ gant an eil hag an trede derez. Er rummoù-se o devo tro ar studierion da bleustriñ war zanvezioù lennegel ha skiantel liesseurt a ledanay o anaoudegezh eus ar yezh hag o barrekay da dennañ eus ar brezhoneg an implij a dennont eus ne vern pe yezh etrevroadel a sevenadurezh.

Ouzhpenn ar rummoù dre gomz stag ouzh an trevioù hag ar c'hendrevioù ez eo bet ensavet ivez ur Skol dre lizher a zo en he c'harg pourchas d'ar studierion digenvez, er-maez eus an trevioù hag ar c'hendrevioù, an deskadurezh vrezhon a eil hag a drede derez o eus ezhomm anezhi.

PENAOS E VEZ SAVET KREIZENNOU "SKOL AN EMSAV"

Kreizennoù SKOL AN EMSAV a vez savet dre m'en em led trevioù ha kendrevioù an Emsav ha war un dro ganto, evit gwalc'hañ ezhommoù kelennerezhel ar re-se. Pep skol eta a

(1) Anat eo e c'hell ar re a oar dija komz ha skrivañ ar yezh (pe o dije desket er gêr pe en ur skol diframm) dont tre war-eeun en eil pe en trede rumm.

a vez savet diwar c'houlenñ un drev pe ur gendrev hag a vez
melestret gant an drev hag ar gendrev, a bourchas dezhi, pergen,
ar salioù skol hag ar stalikerezh kenteliañ, ivez a bled
gant urzhiadur ar skol er par lec'hel hag a c'hopr, erfin,
ar gelennerion.

ANVIDIGEZH AR GELENNERION

Evel m'eo bet merket uheloc'h, gopret e vez ar gelennerion
gant kuzul an drev pe ar gendrev hogen bez e rank ar gopratur-se
bezañ kadarnaet gant poellgor-kreiz SKOL AN EMSAV a zezvarno
barregezh an danvez kelenner o terc'hel kont eus an anaoudegezhioù
en devo dastumet dre hent SKOL AN EMSAV e unan hag an arnodennoù
en devo tremenet.

Pa n'o devez ket an drev pe ar gendrev ar gelennerion a
garfent kaout en o gourc'hemenn, e vez kinniget unan pe veur
a hini gant poellgor kreiz SKOL AN EMSAV ; anvet e vez ar
gelennerion eta dre gengrad a-berzh an drev ha poellgor-kreiz
SKOL AN EMSAV.

STUMMADUR AR GELENNERION

Ur stummadur azas ouzh o derez skoliañ a rank kaout ar
gelennerion. En amzer-da-zont eta e vezo arc'het digant kelennerion
an derez kentañ bezañ entitlet eus an TREC'H KENTAÑ (rumm elfennel
ha rumm klokaat) ; digant ar gelennerion trede rumm (lennegezh
hag istor) bezañ entitlet eus an TREC'H MEUR ; ar gelennerion a
vo fiziet enno ar rummoù a eil hag a drede derez a ranko kaout,

en tu-hont d'an Trec'h-Meur, testenioù-studi o kensellout danvezioù o c'helennerezh.

Dremañ a reer ivez ouzh ensavidigezh arnodennoù all a rez skolveuriek hag a c'hoarvezo pergen eus prientadur ul labour a imbourc'h gwriziennel o tennañ d'al lennegezh pe d'ar skiantoù (diwar-benn, lakaomp oberenn ur skrivagner brezhonek pe un destenn skiantel ha n'eo ket bet meret c'hoazh e brezhoneg) ; al labourioù a imbourc'h-se a entitlo ar re o devo savet anezho eus grazioù arbennik hag a enwirio ar c'hrazidi da emstrivañ war wel ur garg a gelenner en eil pe en trede derez.

Anat eo ne vo lakaet ar raktres-mañ da dalvezout nemet tamm-ha-tamm. Evit ar poent, ha betek gortoz, o vezañ m'eo dibaoet kenañ an danvez kelennerion e vezo anvet ar gelennerion dre gengrad etre an trevioù ha poellgor-kreiz SKOL-AN-EMSAV, hep d'erc'hel kont eus arnodennoù hogen hepken eus anaoudegezhioù ha barregezh pleustrek ar re-se. A-feur ma kresko niver ar c'hreizennoù avat e vezo lakaet ar vonreol-mañ da dalvezout tamm-ha-tamm.

Merkomp, en diwezh, n'eo ket kefridi nemeti SKOL AN EMSAV kelenn ar yezh hogen ivez krouiñ kreizennoù a vuhez veizel ha sevenadurel e brezhoneg. E ser pep kreizenn eus SKOL AN EMSAV e c'hello bodadoù imbourc'h pe studi arbennik, strolloù c'hoariva, kelc'hioù folklor h.a., a-benn diorren tamm ha tamm ur gefredelezh vrezhon wirion.

II

L E C'H I A D U R SKOL AN EMSAV EN ISTOR KELENNEREZH AR
BREZHONEG E BREIZH EN UGENTVET KANTVED

E-keñver ar raktres emamp o paouez braslinennañ ez eo mat reiñ un alberz eus istor kelennerezh ar brezhoneg e Breizh en ugentvet kantved ; evel-se e vezo merzet splannoc'h orinelezh ha dibarelezh SKOL AN EMSAV hiziv an deiz.

N'emaomp ket e soñj ober amañ hanez ar skolioù brezhonek dre ar munud. Lavaromp hepken ez eus bet savet e-leizh a rummoù kentelioù brezhonek, dre gomz ha dre lizher, abaoe deroù ar c'hantved-mañ. Peurvuiañ avat e veze aozet ar c'hentelioù-se war ar par lec'hel, diwar intrudu un den hepken(1), pe en ur c'helc'h ketiek bennak (e Roazhon pe e Paris etre an daou vrezel, da skouer) pe en ur skolaj pe ul lise bennak, e-lec'h e oa roet d'ar yezh saviad un obererezh a ziduamant (kounomp, da skouer, hini skolaj Sant-Charlez e Sant-Brieg embreget ha renet gant Frañsez Vallee e-lec'h e teskas ar skrivagner Taldir elfennoù ar yezh lennegel) hep emell kefridiel ebet, a-hend-all, a-berzh mererezh an deskadurezh c'hall.

Distank tre eo bet bepred ar rummoù kentelioù-se. N'eus bet anezho nepred nemet e kêrioù brasañ Breizh hag e Paris. Digevre ez eo bet ivez bepred an holl gentelioù-se, hep program na doareoù-kelenn boutin, hep stummadur na frammadur da harpañ ar gelennerion en o labour, darn o kelenn ar yezh

(1) E 1913 e oa bet empennet gant Taldir ha stourmerion BRUG sevel ur rouedad skolioù brezhonek red mennet da zeskiñ lenn o yezh d'ar vrezhonegerion yaouank a oa stank tre neuze lenn ha skrivañ o yezh (diwar skouer ar c'hevre gouezelek). Hogen gant ar brezel o tont e chomas ar raktres kaer-se war ar paper.

unvan a-raok ar brezel, da skouer, darn all rannyezhoù (hini Wened, dreist-holl) evel ma kaver c'hoazh hiziv an deiz skolioù digenvez a gelenn ar brezhoneg bepred er skritur "falc'hunek" kempennet war-lerc'h ar brezel diwezhañ evit ezhommoù politikerezh rannvroel ar Skol-veur c'hall.

Spered ar skolioù-se a zo ken dizunvan all. Daoust maz eo renet darn anezho gant broadelourion e kelennont holl ar brezhoneg gant ur spered yezhelour hag hengounelour, hep raksell ebet war dazont ar vroad na preder ebet gant tonkadur Breizh, o tisoñjal e eo kefridi ar skol vrezhon stummañ Brezhoned end-eeun. E seurt skolioù en em ziskouez ar yezh, a-benn ar ar fin, enta, evel un "hobby" pe un danvez gouiziek, par d'ar sanskriteg pe d'ar sumereg. War ar marc'had ne aotreont ket d'ar skolidi gwellaat o anaoudegezh eus ar brezhoneg ur wech m'o devez desket an elfennoù anezhañ. An uhelañ a dizhont eo deskiñ dezho diazezoù ar yezh eeun. Da lavarout eo, hini ebet eus ar skolioù-se n'eo barrek da grouiñ endro dezhi an disterañ elfenn a gevredigezh vrezhon, ar pezh a zle bezañ - henn adlavarout a reomp - pal kentañ pep skol vrezhon.

Kemendall a c'heller lavarout ivez diwar-benn ar skolioù dre lizher a zo bet savet dreist-holl abaoe daou-ugent vloaz bennak. Moarvat, SKOL OBER, krouet e 1930 gant broadelourion ha bet renet hag embreget gant broadelourion he deus graet ur strivad ramzel evit deskiñ elfennoù ar yezh da viliadoù a Vreizhiz. Hogen, adarre, bez ez eo chomet ar Skol-mañ un oberenn hiniennel, digevre ha diframm, sammet gant un toulldig

bihan a dud, ha na c'helle a-se kinnig netra en tu-hont d'un nebeut anaoudegezhioù yezhel. Manet eo eta war dachenn galvezel rik ar c'helennerzh. Ne oa antellet nag empret e nep doare ouzh ur gevredigezh vrezhon krouet pe da grouiñ.

An hevelep mank a gaver en ur Skol dre lizher all savet war-lerc'h ar brezel diwezhañ gant Visant Seite. Desket he deus ar skol-se diazezoù ar yezh da gantadoù ha kantadoù a Vrezhoned hep tizhout evit-se krouiñ an disterañ roud a gevredigezh vrezhon endro dezhi.

Eus pezh hon eus nevez displeget e c'hellomp dastum kement-mañ : betek henn, hag abaoe maz eus un Emsav e Breizh, ez eo bet kredet - dre fazi ent anat - e oa a-walc'h kelenn ar yezh evit ma treistvevje houmañ ; goulakaat a raed e oa a-walc'h arbennoù personel - ranellder, emstagerzh ouzh an tiegezh, trivliadelezh liesdoare - evit reiñ da unan ar youl da beurzeskiñ ar yezh e unan ha d'he legadiñ d'e vugale. Sklaer eo koulskoude ne c'hell unan ober ar gammed-se a empleg ur strivad kalet meurbet ha kalz a vennerezh anez gellout reiñ d'ar strivad-se ur ster hollek, politikel ha zoken speredel. Fazi an holl skolioù-se eta a zo bet chom war dachenn galvezel ar c'helennerzh ha tremen hep reiñ d'ar yezh ur ster resis. Rak-se ivez ne oant ket evit krouiñ endro dezho ar gevredigezh vrezhon nevez a oa da grouiñ end-eeun evit ma c'hellje ar yezh peurbadout.

Ret eo ouzhpennañ ne selle ket - ha ne sell ket hiziv zoken, ma lakaer a-ziforc'h SKOL OBER - atebion hag aozerion ar skolioù-se ouzh o oberenn evel un oberenn-hollbouezus. Ar pal pennañ evito e oa lakaat ar brezhoneg e skolioù ar reizhiad c'hall a zeskadurezh e Breizh. An amkan-mañ zoken a yae hag a ya d'ober ar pep pennañ eus politikerezh strolloù evel AR BREZHONEG ER SKOL, AR FALZ, ENGLEV BREIZH h.a.

E-touez ar stourmerion a strive evit lakaat kelenn ar brezhoneg er skolioù gall e Breizh, avat, e c'heller diforc'hañ daou rumm.

Ar rumm kentañ a zo hini ar vroadelourion. Gwelout ar raent e kelennerezh ar yezh er skolioù gall un tu da ledanaat kelc'hiad ar yezherion a c'hellje kaout anaoudegezh eus ul lennegezh vroadel vrezhon ha dont evel-se da vezañ broadelourion. Etre an daou vrezel hag e-pad ar brezel ez eo bet brogarourion evel Yann Sohier, Roparz Hemon, Yann Fouere, e penn ar stourmad-se. O savboent a oa reizh. O fazi e oa krediñ ez eo a-walc'h dont da vezañ broadelour evit kemer perzh er stourm broadel : hep kevredigezh ha framm brezhon e-lec'h e kav e blas hag e roll, ur broadelour brezhon nevez ned eo nemet un oristal ouzhpenn e Breizh. Dañjer a oa a-hend-all o ouestlañ re a amzer d'un oberenn a eilpouez.

Ar rumm all a oa hini ar rannvroelourion a voe renet dreist-holl abaoe an eil brezel gant F. Falc'hun hag A. Keravel hag harpet gant an aozadurioù ledemsavel, BLEUN-BRUG hag AR FALZ.

Hervez ar re-mañ eta e oa ar brezhoneg :

1) ur yezh rannvroel ; ar galleg an hini eo a oa yezh vroadel ar Vrezhoned ;

2) ur yezh diwar ar maez a ranke bezañ miret da gouerion kornog ar vro nemetken.

Ar pennaennoù-mañ a oa e diazez ur politikerezh faezhat a lakae al ledemsaverion da grediñ e vije prestoc'h ar gouarnamant gall da blegañ d'ur roll-goulennoù izek diwar-benn ar yezh. E devoud e tegemere an tudennoù-mañ da vat diazezoù an arguzerezh a implijent evit gounit grad-vat ar gouarnamant gall. Gwirion eo oant eta.

An arguzerezh-mañ avat ne c'helle disoc'hañ nemet d'un hent dall rak en em harpañ a rae war goulakadurioù arvarus. Goulakaat a rae ar rannvroelourion eta :

1) e c'heller diorren ur yezh hag ur sevenadur poblek diwar ar maez a-ziforc'h. Faoz eo ar goulakadur-se. Ur yezh hag ur sevenadur a vez krouet hepken gant ur gevredigezh kenurzhiat en ur stad pe o tennañ d'en em genurzhiañ en ur Stad. A-walc'h eo studiañ istor ar yezhoù hag ar sevenadurioù o deus graet berzh abaoe m'eo bet diskaret an impalaeriezh roman (hep kontañ degouezh an impalaeriezh roman e unan) evit meizañ ez eo stag bepred berzh hag emled ar yezhoù ouzh berzh hag emled ar stadoù o doa graet anezho yezhoù kefridiel a-berzh-stad.

2) Goulakaat a ra ar rannvroelourion e c'hell ur yezh bevañ en ur ghetto. Rak ar gouerion barnet da virout ur yezh ha na vije ket hini ar peurrest eus ar gevredigezh m'emañ klenket enni a zo bac'het dre se en ur ghetto, dreist-holl en ur sevenadur arnevez a zaremprederezh stank etre ar renkadoù hag a ziverk muioc'h-mui pep diforc'h etre maeziou ha kêriou. Hogen n'hon eus skouer ebet eus ur gronnad tud bennak serret en ur ghetto hag he dijet miret ur yezh dezhi hec'h unan ; seurt gronnadoù n'int ket emvastus nag emren tamm ebet ; ha dre se ivez e vezont hevelebekaet buan tre ouzh ar vroad ma vevont en he c'hreiz. Skouer ar Yuzevion en Europa a zo kentelius er c'heñver-se. Bepred eo deuet ar re-se da zegemer ar yezh a veze komzet war o zro gant ar boblañs a enkloze anezho.

3) Goulakaat a ra ar rannvroelourion e c'hell an divyezhegezh bezañ ur saviad padus. (rak, eveljust, e klaske ar rannvroelourion tennañ ar gouerion eus o ghetto o reiñ dezho da anavezout yezh ar gevredigezh vourc'hiz c'hall a zo mestrez ar Stad c'hall ha mestrez Vreizh war un dro). Hogen en istor n'hon eus skouer ebet eus kevredigezh divyezhek padus ebet. Bez ez eo bet an divyezhegezh (1) a viskoazh ur prantad eskemm yezh ha na bad ket nemeur en tu-hont da dri remziad tud.

4) Erfin, goulakaat a ra politikerezh ar rannvroelourion ez eo bev dalc'hmat ar pezh a anvont "yezh ar bobl" hag e tle ar yezh lennegel hec'h unan kemer da batrom ar "yezh"-se.

(1) Komz a reomp eveljust eus divyezhegezh wirion, pa oar ur boblañs bennak kerkoulz div yezh. Kalz tud a oar lenn ha skrivañ div yezh hep bezañ evit keloù se divyezherion.

Ar wirionez avat a zo disheñvel. N'eus mui, diouzh pezh a
anzav ar rannvroelourion o unan ~~se hon eus merket~~ - nemet 500.000
a dud oc'h ober gant ar yezh bemdez hogen o vezañ ma komz
un darn vras eus ar re-mañ galleg ouzh o bugale en o ziegezh
a-benn chom hep skoilhañ anezho e skolioù ar Stad c'hall e
c'heller adal bremañ rakwelout ar mare ma steuzio penn-da-benn
an teodyezhoù - anvet "yezh vev" - a zreistveve c'hoazh e
kornog ar vro. Ar wirionez eo n'eus nemet ur brezhoneg bev :
hini an Emsav an hini eo.

Sklaer eo, diouzh pezh emamp o paouez displegañ e ser
politikerezh ar rannvroelourion diwar-benn ar yezh, n'en deus (1)
ar politikerezh-se ster ebet na, dre se, levezon ebet war
donkadur ar yezh hec'h unan : houmañ a zo barnet d'ar marv
- gant ar brezhoneg er skol, er skinwel, pe get - er reizhiad
c'hall a zo o ren bremañ. Er gwellañ degouezh e c'hell ar
politikerezh a gasont da benn bremañ treuzfurmañ ar brezhoneg
en un doare latin a vo desket - mui pe vui - gant un dornadig
a Vreizhiz a remziad da remziad hogen n'en devo ster na talvoudegezh
ebet evito o unan nag evit pobl Vreizh en he fezh. Dirak an
diwelad-se nac'het a-grenn ganta : e rank SKOL AN EMSAV war
un dro gant an EMSAV resizañ e sellboent diwar-benn ar ster
a zo da reiñ d'ar yezh ha d'ar stourm a-benn hec'h adsevel.

(1) Ar politikerezh-se n'en deus nemet un diazez trivliadel
e spered tud ha n'int ket evit degemer ez eo marv, a-benn bremañ,
ar gevredigezh henvoazel o deus anavezet gwechall. Tremenelourion
a zo anezho, dic'houest da dalañ ouzh an dazont.

III

STER AR YEZH HERVEZ SKOL AN EMSAV

Politikerezh SKOL AN EMSAV diwar-benn ar yezh eta a gav he sichenn er gredenn ez eo Breizh ur vroad par d'ar broadoù all Europa hag enwiriet da c'houlenn an hevelep saviad politikel hag int. Diogeliñ a ra diazezerion SKOL AN EMSAV, a-se, ne c'hell ar brezhoneg bezañ savet eet ha miret - ma rank bezañ - nemet evel yezh ur vroad hag ur gevredigezh klok. Se zo anat a-hend-all diouzh burutelladur tezennoù ar rannvroelourion diwar-benn ar yezh a zo bet graet ergentaou. Hogen klask a raimp a-benn bremañ dezrevell war-eeun savboent SKOL AN EMSAV diwar-benn ar yezh hag ar stourm evit ar yezh.

Kavout a ra, da gentañ, da SKOL AN EMSAV ne c'heller ket goulenn digant ar Vrezhoned ober ar striv a addeskiñ ar yezh - ma rankont hec'h addeskiñ tamm ebet - ma ne ginniger ket dezho ur rakwel entanusoc'h ha kalonekausoc'h eget an hini brizh-trivliadel a zrailhañ adarre trefodaj o zadoù kozh, aspadenn disneuziet da heul kantvedoù a sklavelezh yezh hor gourdadoù a reas eus Breizh gwechall ur Stad dishual. Ar reizhveizadur nemetañ eus ar brezhoneg a zo hini ar brezhoneg yezh vroadel an holl Vrezhoned gwitibunan ha benveg adsevel ur sevenadur gwerinel nevez el ledenez-mañ.

Da gentañ, bez ez eo ar brezhoneg yezh vroadel an holl Vrezhoned, ken Brezhoned ar Reter, ken Brezhoned ar C'hornog. An diogeladur-mañ a c'heller gwiriañ e meur a zoare. Ent istorel

evit kregiñ, bez ez eo ar rannadur yezhel etre kornog ha reter, frouezh darvoudoù politikel a denne da zistrujañ Breizh ha na c'hall nep emsaver, dre se, degemer. Ent istorel, adarre, bez ez eo diazezet an Emsav war ar Stad vrezhon savet en navet kantved hag ar brezhoneg a oa yezh kefridiel ar Stad-se (1).

Hogen en un doare kalz strishoc'h ha kalz tostoc'h ez eo ar brezhoneg yezh vroadel an holl Vrezhoned. Stummet eo bet ar yezh lennegel abaoe un nebeut kantvedoù gant Brezhoned eus holl rannbarzhioù ar vro hag hiziv an deiz e tenn an hanter eus eus hor skrivagnerion o orin eus rannvroioù ar reter eus kêrioù gallekaet ar c'hornog. Ouzhpennomp, dres, a-hend-all, ez a da get muioc'h bemdez an diforc'h etre "Breizh-izeliz" ha "Breizhuheliz" o vezañ maz eo bet gallekaet adal bremañ ar pep brasañ eus poblañs kornog ar vro.

An unvaniezh endro d'ar yezh vroadel n'eo ket c'hoarvezet en Emsav hag e Breizh dre zegouezh hepken. Komprenet mat o deus ar stourmerion e oa tonket da Vreizh bezañ klenket er meizframm gall - goude m'he dije tizhet ar frankiz politikel zoken - ma ne c'helle ket tennañ he mad eus ur benveg a vuhez veizel arbennik. Ar yezh hepken eta a c'helle pourchas d'ar vroad

(1) Orin kevandirel pe enezel ar brezhoneg n'en deus pouez ebet. Ne vern penaos ne oa diforc'h ebet, evel ma ouzer, etre keltieg Galia ha keltieg Enez Preden. Ar c'heltieg a zo eta yezh istorel nemeti Breizh, kollet gant ar boblañs da vareoù disheñvel, abred pe ziwezhat. Ma oa bev bepred ar c'heltieg kevandirel d'ar mare ma touaras ar bagadoù Brezhoned kentañ e Breizh ne ra an devoud-se nemet startaat hon tezenn, elese ez eo ar c'heltieg yezh istorel nemeti an holl Vrezhoned. Hogen n'he deus ket ar vreutaenn-se kalz a bouez evit an EMSAV o vezañ ma stag hemañ ar yezh ouzh al labour krouiñ politikel, da gentañ.

he frankiz speredel.

Dreist-holl ivez, ar yezh hepken a c'helle mirout d'ar vroad he gwriziennelezh istorel hag aotren dezhi krouiñ ar sevenadur a gloto gant he stuz kevredigezhel diseurt disheñvel krenn diouzh hini ar bobl c'hall.

Ar vroad c'hall a zo bet stummet gant renkad ar vourc'hiz-
ion c'hall o deus kemeret ar galloud er Stad c'hall ent digor a c'houde
dibenn an triwec'hvet kantved hogen e devoud ez eo ar renkad-se
krog e levierzh ar Stad-se adal ar XVIvet kantved. Ideologiezh
ar Stad c'hall a zo bet eztaolet dre ar galleg hag houmañ a zo
deuet da vezañ peadra diarallaus ar vroad c'hall, ne vern petra
e vo ar renad a vo er penn anezhi warc'hoazh. Gwiriañ a c'heller
an anadenn-mañ en emdroadur ar Strollad komunour gall en deus
assammet kevala istorek ar vroad vourc'hiz c'hall ha pergen
an hengoun jakobin - kv. e ersav ouzh kinnigoù J.J. Servan-
Schreiber diwar-benn ar rannvroeladur - hag a embann zoken
ez eo derc'houezer gwirion an hengoun bourc'hiz-se. E gwirionez
en deus ar Strollad komunour gall assammet kevala istorek ar
Stad c'hall evel m'he deus ar Stad soviedat assammet hengoun
prusat-tsarat ar Stad rusian a gentaou.

Pobl Vreizh avat n'he deus bet biskoazh bourc'hiziezh
vroadel ebet. N'he deus ket anavezet en ur framm broadel an
eneberezhiou renkad o deus graet istor ar vroad c'hall, da
skouer. N'eus bet anezhi biskoazh nemet gwerin diwar ar maez.
Arsevenadur hag ar stuzegezh vroadel nemeto o deus krouet Breizhiz
a zo ur sevenadur hag ur stuzegezh werinel. Dre se end-eeun eo

ez eo pobl Vreizh disheñvel a-grenn diouzh ar bobl c'hall.

Hogen petra a c'hoarvezfe ma asantfe ar Vrezhoned - ha pergen an Emsaverion - da gemer ar galleg da yezh o buhez veizel ? Daoust dezho en em gavfent klenket er bed meizel gall, er sevenadur hag er stuzegezh c'hall a zo bourc'hiz dre natur, da lavarout eo estren a-grenn ouzh talvoudoù ar sevenadur hag ar stuzegezh vrezhon a zo gwerinel. Evel-se ar gallekadur en hor bro n'en deus da zisoc'h nemet distrujañ ar Vrezhoned evel gwerinourion evit ober anezho bourc'hizion c'hall, diouzh ar patrom bourc'hiz degemeret gant holl zalc'hidi ar Stad c'hall.

SKOL AN EMSAV a zo bet **savet**, da gentañ, evit parrat ouzh an dañjer-se, da lavarout eo evit aotren da bobl Vreizh krouiñ, dre ar yezh vroadel, ur sevenadur hag ur stuzegezh vroadel o klotañ gant he natur istorel. Ne gelenn ket ar brezhoneg eta evel "aspadenn diwezhañ ar yezhoù keltiek war an douar-bras", nag evel "yezh Vreizh-Izel" pe evel "yezh an tadoù-kozh" hogen evel yezh vroad werinel Vreizh a gemer skiant anezhi hec'h unan hag a fell dezhi en em urzhiañ e framm ur gevredigezh hag ur Stad o c'houzout na c'hell kaout buhez vroadel ebet nemet dre he yezh e ve hag o vennout, e sêr kempenn **ur sevenadur** nevez daskoriñ d'ar bed ur patrom dibar a speredelezh.

SKOL AN EMSAV a zo eta skol vroadel ar Vrezhoned hag he fal n'eo ket deskiñ ar yezh hepken d'ar re a zeu enni daoust ma ra an dra-se dre zegouezh hogen, da gentañ, lakaat ar Vrezhoned

da emouezañ ouzh o broadelezh ha gemer perzh e buhez ar
gevredigezh vroadel nevez a savo warc'hoaz ar Riez Vrezhon.
Buhez ar gevredigezh vroadel-se avat a vo, da gentañ,
sevenadurel ha speredel ha rak-se ez eo ken pouezus kelen-
nerezh ar yezh, studi hol lennegezh, . savidigezh ur Skol-Veur
vrezhon ha krouidigezh ur reizhiad kelenn brezhon broadel

IV

AN HENT WAR-DU AN UNDED : KADEREZH SKOL AN EMSAV BETEK AR STAD VREZHON

Pa implijomp ar ger "broadel" e ser ar reizhiad kelenn
e fell deomp lavarout eveljust e tle ar reizhiad-se bezañ
ledet d'ar vroad a-bezh : n'eus broad ebet hep un unded
speredel bennak war ul live zo. Ret mat eo deomp stadañ
ket
avat n'omp degouezhet nes d'an unded-se hiziv an deiz.
Gwelet hon eus endev ez eus e Breizh skolioù brezhonek a
bep seurt, dezho amkanioù hag a-wechoù skriturioù liesseurt.
En em c'houlenn a c'heller eta peseurt darempredoù a c'hell
SKOL AN EMSAV kaout gant ar skolioù brezhonek a vremañ ha
peseurt emzalc'h a gemero en o c'heñver.

E-touez ar skolioù brezhonek a zo o vont endro hevlene
e c'heller diforc'hañ tri rummad : 1) ar skolioù prevez
digevre ha diframm; 2) ar skolioù prevez kevreet e framm
ur gevarzhe rannvroel ; 3) ar rummadoù kentelioù a vezo aozet

e diabarzh ar reizhiad kelenn gall diwar-lerc'h lezennoù embannet e Paris a-du gant ar brezhoneg.

A-gevret e c'hellomp lakaat ar daou rummad kentañ. Petra bennak ma c'hellont bezañ renet, evel m'hon eus merket, gant broadelourion a-wechoù n'eo ket ket gwall zisheñvel degouezh ar re gantañ diouzh hini an eil re. En o ser e c'heller dremmañ ouzh daou c'hoarvezad. Ma kelennont ar yezh evel un danvez didu pe un hendra - ha kement-se, henn adlavarout a reomp a c'hell bezañ graet gant kelennerion a zo "broadelourion" sañset - ne c'hell ar gelennerion nag an diskibion reiñ kalz pouez d'o labour ha tonket e vo d'ar skolioù-se krakvevañ ha dizeriañ dizale. Kemendall a c'heller rakwelout a-zivout ar skolioù rannvroelour, digevre pe gevreet: o vezañ ma kelennont ar yezh evel un danvez diret a eilrenk ne c'hell o c'helennerion nag o diskibion biken diskouez kement a c'hred ha kelennerion pe ziskibion SKOL AN EMSAV a oar e tenn o obererezh da grouiñ ur stumm kevredigezh nevez e Breizh.

E gwirionez ez eo dleet d'ar skolioù-se mont da get war un dro dindan levezon SKOL AN EMSAV ha moarvat dirak emled ar c'hentelioù graet a-gefridi e skolioù ar reizhiad kelenn gall. Mat eo eta ensellout bremañ an daelerezh a gemero lec'h hep mank etre SKOL AN EMSAV ha kentelioù brezhonek ar reizhiad kelenn gall. Tri arvez a zo d'an daelerezh-se.

1) Diouzh un tu e tenno SKOL AN EMSAV he mad eus kelennerezh ar yezh e skolioù ar Stad c'hall evit tremen war-eeun eus pazenn

an deskiñ yezh da hini ar c'helenn er yezh ; e-lec'h koll
ur bloavezh o teskiñ elfennoù ar yezh d'ar skolidi e c'hello
kelennerion SKOL AN EMSAV kregiñ diouzhtu gant ar c'helenn e
brezhoneg ; da lavarout eo, dleet eo da skourr an eil derez
dre gomz ha dre lizher kreskiñ buan adal ar mare ma ouezo
ar skolidi komz, lenn ha skrivañ ar brezhoneg eeun o tont
da gentelioù SKOL AN EMSAV.

2) Daoust da arvaroù ha da skoilhoù zo ez eo a bouez
bras moarvat e ve kefleuniet ar muiañ ar gwellañ a gargoù
kelenner brezhoneg gant izili eus SKOL AN EMSAV er reizhiad
kelenn gall, pa ne ve nemet evit mirout na zeufe ar reizhiad-se
da vezañ ur c'hreñvlec'h d'ar rannvroelourion.

3) Erfin, diwar ar c'hevezerezh a savo etre ar reizhiad
kelenn broadel ha skourr ar reizhiad kelenn gall kefridiet
e kelennerzh ar brezhoneg e klasko ar skourr-se e unan astenn
he zachenn oberiañ muioc'h-mui evit gellout talañ ouzh levezon
SKOL AN EMSAV. Dre se e ve degaset da zeskiñ ar yezh da vuioc'h-
mui a skolidi ha da aesaat war un dro tutaerezh SKOL AN EMSAV.

Ar c'hevezerezh a vo diazezet etre SKOL AN EMSAV hag ar
reizhiad kelenn gall war dachenn ar yezh avat ne c'hell nemet
treiñ a-du gant SKOL AN EMSAV, bepred dre 'n arbenn ma vank
ur ster da gelennerzh ar brezhoneg er reizhiad kelenn gall.

Chom a ra deomp ensellout degouezh "Skourr an Deskadurezh Vroadel" enframmet ebarzh "Emsav Stadel Breizh" hag a venn tizhout an hevelep amkanioù ha SKOL AN EMSAV, elese krouiñ ur reizhiad kelennerezhel broadel e servij ur gevredigezh vroadel, - ken e c'hell unan en em c'houlenn perak n'eo ket SKOL AN EMSAV unan gant "Skourr an Deskadurezh Vroadel".

Displegañ perak n'eo ket SKOL AN EMSAV evit en em gemmeskañ gant "Skourr an Deskadurezh Vroadel" a zo koulz ha diskleriañ perak ne c'hell ket E.B.V. en em unaniñ gant E.S.B. ha dezrevell eta peseurt diforc'h a zo etre kelennadurezhioù an daou aozadur.

Da soñj diazezerion E.B.V. en em genaoz ar gevredigezh diouti hec'h unan, gant gwarez ar Stad, hogen o virout hec'h emrended en he c'heñver. Gwelet hon eus, da skouer, e oa an trevioù, war an diaz, atebek eus ar skolioù ; karget eo ar poellgor kreiz da harpañ intrudu ha mererezh an trevioù.⁽¹⁾ Ez pleustrek eta, hiziv an deiz, en em urzh SKOL AN EMSAV eus he ferzh hec'h unan hep bezañ reolet e nep doare gant E.B.V. daoust ma labour un niver bras a izili eus E.B.V. enni.

An eneb eo a c'hoarvez avat e "Skourr an Deskadurezh Vroadel". Hag eñ krouet penn-da-benn gant E.S.B. ez eo ar Skourr isurzhiat penn-da-benn dezhañ. En E.B.V. en em genaoz ar gevredigezh adal an diaz hag ar strolloù diaz end-eeun a vir da bep pazenn an holl emrended a zo gallus aotren dezho.

(1) Anat eo he deus ar Stad da bleidiñ gant an deskadurezh war-eeun adal m'he deus houmañ da bleidiñ gant ar skiant hag ar c'halvezerezh pe an imbourc'herezh. Diouzh ma c'hoari ar skol roll un aotroniezh speredel e tle chom emren er pep brasañ eus hec'h obererezh.

Splann a-walc'h eo, dre se, an diforc'h etre an div reizhiad
ha n'eo ket dav pouezañ muioc'h warni.

Diskoulm ar c'hevezerezh a ren er mare-mañ - pe a c'hellfe
ren rak emañ an daou aozadur en o deroù koulz lavaret - a vo
war un dro kalvezel ha politikel. Fellout a ra deomp lavarout
e vo trec'h an aozadur a ouezo bodañ ha lakaat da labourat
a-gevret ar Vrezhoned varrekañ war dachenn ar yezh, an desk-
adurezh hag ar c'helennerzh ; fraost eo an dachenn avat ha
pep hini a c'hell arat ; an eost a vo medet gant ar gounideg
a anavezo e vicher. Ret eo da bep aozadur gouzout hepken ne
adsaver ket ur sevenadur pe ur vroad gant un dousennad a dud,
gant kantadoù ha miliadoù ne lavaromp ket. Da bep hini ober
bec'h eta.

Diouzh un tu all ne c'hell nep aozadur komz en anv ar
vroad hag arc'hiñ derc'houezañ he reizhveliegezh abarzh
bezañ gounezet he fiziañs. Rak-se n'eus ket fellet da SKOL
AN EMSAV implijout nag ar ger "broadel" peogwir n'he deus
ket SKOL AN EMSAV tizhet ar vroad evit c'hoazh nag - ha
nebeutoc'h c'hoazh - ar ger "stadel" en abeg da c'hwezh ar
"stadelouriezh" a zo stag ouzh ar ger-se hag a zo enebet
krenn ouzh kelennadurezh an EMSAV.

Bezef pe vezef, da labourerion SKOL AN EMSAV ha da
bobl Vreizh war un dro eo divizout ha dont a ray SKOL AN EMSAV
da vezañ skol vroadel ar Vrezhoned warc'hoazh.

TONKADUR SKOL AN EMSAV EN TU ALL D'AR"STAD VREZHON"

N'eo ket roll SKOL AN EMSAV sevel war-eeun ur riez el ledenez-mañ, anat eo ; ar roll-se a aparchant da aozadurioù all ha pergen da E.B.V. Ur wech ma vo bet savet pe gempennet ar Stad vrezhon gant E.B.V. e kloto kefridi SKOL AN EMSAV gant hini gwazerezh broadel an Deskadurezh, da lavarout eo gant hini ur vaodiernezh stadel. Neuze, eveljust, e vo brasoc'h perzh eeun ar Stad en urzhierzh kevrennoù zo eus an Deskadurezh e Breizh, pergen en hini an trede derez, an imbourc'herezh hag ar c'halvezerezh koulz hag e reolerezh ar c'hevrennoù all eget a c'helle bezañ re ur poellgor-kreiz o leuriadañ un aozadur kevredik dibourvez en abeg d' e brevezded ha gouestlet dreist-holl d'ar c'hentañ ha d'an eil derez. A-hend-all, ar poellgor-kreiz-se a zeuy d'en em gemmeskañ evit darn gant maodiernezh an deskadurezh. Evit darn hepken a lavaromp rak e meur a geñver e tleo reizhiad an deskadurezh mirout hec'h emrended a-benn gellout seveniñ he c'hefridi a aotrouniezh speredel a zegouezh ez natur dezhi.

C'hoarvezout a c'hello avat ne vo ket savet diouzhtu ur riez vrezhon emveliek hogen, da gentañ, un doare Stad vreizhat oc'h en em vataat eus un nebeut frankizioù. Er Stad-se, dreist-holl ma vez savet abred, e vezo mestr moarvat frammoù hengounelour hag armerzhelour, gouvriaded ar renad gall a gentaou ha dic'houzvez eus ar brezhoneg ha nebeut e chal gentañ.

Kredapl eo e vefe aotreet d'ar c'houlz-se ul lec'h un tamm brasoc'h d'ar yezh er skolioù kefridiel, er skingomz hag er skinwel eget dindan ar gouarnerezh gall e unan hogen hag eñ brasoc'h ne vefe ket al lec'h-se evit bastañ da ezhommoù un advrezhonekadur hag un advroadeladur gwirion eus ar vro. Degouezh Iwerzhon a ziskouez anat peseurt diaesterioù a vez o skoilhaññ ur Stadvroadel a zo bet savet kent na vije stummet ar frammoù broadel a zleje bezañ kemeret ar penn anezhi.

E seurt degouezh eta ez eo sklaer ne c'hell ket SKOL AN EMSAV lezel he c'hefridi d'ur gwazerezh led-vroadel divarreket da seveniñ anezhi. Aparchantiñ a ray adarre eta da SKOL AN EMSAV klokaat an tamm deskadurezh vrezhon o devo tapet ar re yaouank er skolioù kefridiel, kreñvaat an emskiant vroadel, /da c'houlenn broudañ ar Vrezhoned e ve brezhonekaet ha broadelet ar Stad /S.A.E. penn-da-benn. Roll a zo bezañ, a-gevret gant aozadurioù all, emskiant hag aotrouniezh speredel ar vroadwar un dro.

Dremañ a rank SKOL AN EMSAV avat ouzh un eil degouezh, diwirheñveloc'h moarvat ar gwirvoudekadur anezhañ, hini ur riez hollveliek diazezet gant ur Strollad kreizennet ha ken-urzhiet strizh. Daoust ha SKOL AN EMSAV a rafe mat o kontañ war ar Stad-se evit kas da benn advrezhonekadur ar vroad, da skouer? War a hañval avat - war verr dermen da vihanañ - ne rafe ket evit an abegoù-mañ :

1) ur Stad hollveliek e Breizh a gemerfe digarez diwar an diorreadur da gas da benn evit reizhwiriañ hec'h hollveliegezh;

dre se e lakfe he freder da gentañ gant an armerzh ;

2) en em skorañ a rankfe war gendereoù stourmerion bet e skol gant strolladoù gall eus an tu kleiz, diseblant ouzh ar yezh hag an emgann sevenadurel ;

3) e degouezh savidigezh ur seurt stad war verr dermen eta ne c'hellfe ket SKOL AN EMSAV kontañ nemeur war frammoù hag amaezhidi ar stad-se a vefe chomet gallegerion a stummadur kefredel gall ;

4) seurt stad adarre a rankfe, war ar marc'had, derc'hel kont eus c'hoantadoù ar boblañs betek ur poent zo ; o vezañ ma ne vije ket bet amzer da zigeriñ spered an dud war gudenn ar yezh hag ar sevenadur ne gomprenfe ket ar re-mañ mat kennebeut an dalvoudegezh anezho ha kredapl eo a-benn ar fin e kavfe ur Stad hollveliek harpet gant stourmerion digas ouzh ar yezh gwell disammañ ar boblañs diouzh pouez an advrezhonekadur o vezañ ma vije pounner a-walc'h a-hend-all bec'hiad ar sokialaat, da skouer ;

5) ur Stad hollveliek e Breizh ne c'hellfe padout nemet gant sikour ur galloud meur estren hag hemañ emichañs ne vefe ket gwall zedennet kennebeut gant kudennoù "lec'hel" ar yezh hag ar sevenadur, gant re an "dispac'h etrevroadel" da gas da benn ne lavaromp ket; rak ret eo lavarout n'eus nemet er broioù keltiek pe en Euzkadi e taler ouzh ur gudenn ken gwazh hag hini adsavidigezh ur yezh peuzvarv ; seurt kudennoù ne gaver nag en Albania, nag e Kuba nag e broadoù all a seurt se graet ganto un dispac'h "sokialour".

Gwelout a reer eta e vefe ken diziouerus ha ken mallus zoken labour SKOL AN EMSAV dindan ur seurt gouarnerezh ha dindan ur gouarnerezh "frankizour". Padal ez eo ret anzav e vefe amjestr meurbet saviad SKOL AN EMSAV dindan ar seurt renad hollveliek dre maz eo enebet kelennadurezh E.B.V. a zo S.A.E. ouzh hini ar Stad hollveliek. e diazez./ Dindan ur gouarnerezh esiz hemañ ez eo an deskadurezh sujet strizh ha war-eeun d'ar galloud stadel ; gwelet hon eus avat e oa an deskadurezh, hervez E.B.V., perzhiek en emrended ar gevredigezh dre vras ; ha bonreizh SKOL AN EMSAV a zo dres diazezet war an emrended-se.

Gallus eoeta e ve ret divodañ SKOL AN EMSAV dindan ur seurt renad hag e rankfe E.B.V. mont dirgel evit seveniñ e balioù hag aozañ e Breizh ar gevredigezh kevarzhel emren a fell dezhi sevel. Gallus eo ivez avat ez asantfe ur seurt renad da genlabour SKOL AN EMSAV dre 'n arbenn ma tennfe kelennerezh ar yezh da startaat e Breizh an emskiant vroadel na c'hell nep stad vrezhon padout hepti. An dac'h evit SKOL AN EMSAV e vefe gouzout ha gellout a rafe, oc'h asantiñ d'ar c'henlabour-se, mirout ar pep pennañ eus hec'h emrended, ha gouzout ivez ha fur e vefe harpañ evel-se ur gouarnerezh ha na glotfe ket ar pennaennoù anezhi gant ar re m'eo-hi diazezet warno.

O klozañ an displegadenn-mañ e rankomp kounañ ne c'hello SKOL AN EMSAV dont a-benn da seveniñ ar gefridi he deus sammet nemet war-bouez ul labour start, urzhiet ha dalc'hus. Arabat eo d'ar stourmerion en em douellañ avat : gant ur striv kalet ha padus zoken ne zeuy anat ar frouezh hag an araokadennoù nemet goustadik meurbet. Prantad al loc'hañ hag an diazezañ, dreist-holl, a vo diaes, en abeg d'an diouer a emskiant vroadel, en abeg da lezober kantvedel ar Vrezhoned, da vruzhunadur an "Emsav" a zalc'h an danvez stourmerion hep urzhiañ o labour en un doare efedus hag o chom bepred war dachenn ar bruderezh. Dav e vo eta, dreist-holl en deroù, kontañ dreist-holl war ar rummadoù yaouank a zo o tont.

Padal ez eo ret-holl kas da benn ul labour frammañ strizh ma fell deomp e teufe pobl Vreizh da gaout fiziañs en Emsav en em ziskouez dezhi, betek henn, e stumm ur goumoulennad paper moulet.

Goude merkañ adarre n'eo stag SKOL AN EMSAV ouzh aozadur politikel ebet, eviti da gaout ur ster politikel anat, e kounomp ur wech c'hoazh en diwezh hec'h amkanioù :

- 1) kreñvaat an emskiant vroadel vrezhon ;
- 2) krouiñ ur gevredigezh vrezhon nevez ;
- 3) pcurchas d'an Emsav hiziv ha d'ar Stad vrezhon warc'hoazh ar frammoù brezhon o devo ezhomm ;

4) bezañ, evit he ferzh ha dre hec'h emrended hec'h eeun, unan eus aotrouniezhoù speredel ar vroad.
